

GWERZ SANTEZ GENOVEFAN



Deut da dis-kin a da ga - nan Bu - e zan-
tes Ge - no - ve - fan; Eur zan-tes vras e
an I - lis, a pa - tro - nes deus a Ba - ris.

DISKAN

- Deut da diskin ha da ganan
Bue zantez Genovefan;
Eur zantez vraz eo enn Ilis
Ha Patronez deuz a Baris.
1. Deut da diskin ha da ganan
Bue zantez Genovefan;
Eur zantez vraz eo enn Ilis
Ha Patronez deuz a Baris.
 2. Bean zo kalz a ilizo
Enn he énor, ha chapelo,
Hag enn Béar e deuz unan :
Koz ilis parous Guenezan.
 3. Enn iliz-man c'hoaz so miret
Darn he relego binniget
Pere a denn deuz ann Envo
Oll bennoz Doue war hon bro :
 4. Klewet et a gant karante
Ar zantelez deuz he bue,
Ewit ma c'helfet evel-t-hi
Plijout da Zoue mui-ous-mui.
 5. Ar zantez-man a oa ganet
Deuz a dud paour herve ar bed,
Kristenien leûn a honestis
Enn Nanter, damdost da Baris.
 6. N'oa na dieguz na penn skan,
Vel ar vugale pervuan,
Bean oa fur ha poëllet mad
Evel eur plac'h zavet enn noad.
 7. Bugelik c'hoaz, re burzudo
Dre c'hallond Doue ann Envo :
Enn he dorn eur bannac'h dour skler
Roaz ar gwelet d'he mam ger.

8. Sant-Germen a welaz eunn de
Ar bugelik man da Zoue,
Hag a laraz e oa galwet
Da vean skoër ar gwerc'hezet.

9. Kasset a oe war dro seiz vla
Dal lanneier vraz da vessa,
Ha gant he denved e tiske
Ann douster, ann humilite.

10. Da bewarzek vla e réaz
Deuz ar gwerc'hezet ar gwestl braz,
Wit allout bean zantelloc'h
Hag enn he ine kals kaëroc'h.

11. Dalek neuze, oll da Zoue,
He c'horfik paour a gastie;
Na de bre na kig na pesket,
Bara heï ha fao a oa he boët.

12. Aliez-braz e kovesse,
Kommunian a re bemde,
Enn ofern e skuille daëro braz
Vel ar Werc'hez ouz troad ar groaz.

13. Pa oe maro he c'herent ker,
Doue, wit rei d'ar bed eur skoër
Deuz a c'hallond ar *Burete*,
He c'hassaz da Baris neuze.

14. Eur zantez ken vraz n'alle ket
Chom hep bean falz tamallet :
Zellet oe vel *hypocritez*
Eur plac'h fall hag eur zorserez.

15. Neuze tenaz deï eul lornez
Hag a badas pad tri blawez;
Mès n'he c'halon n'Otro Doue
Deuz he foanio he digolle.

16. Gouder lornez c'hoaz eur chlenvet
Rez deï bean ken dinerzet
Ma chomas enn pad tri dewez
Dilavar, hep anoudegez.

17. Pad ann amzer-ze oa zavet
Gant Doue barz enn he spëret
Da welet joaio ann Enyo,
Ha deuz ann ifern ar poanio.

18. Goude oe kanet d'ar c'halvar,
Elec'h ma welaz gant glac'har
Jesus-Krist war ar groaz staget
Evel newe *krucifiet*.

19. Adal neuze Genovefan
Rez pinijenno ar brassan,

- Ha Doue, dre he fedenno,
Rez ive kalz a vuzudo.
20. Gwellad re ann dud *possedet*,
D'ar re dall 'roe ar gwelet;
Eur bugel a *ressusitaz*
Dre he feden ha zin ar groas.
21. Mès piou-ta biken a laro
Pegement re aluzono,
He c'harante wit ar bewien
Ar boan gemere d'ho zouten.
22. Eur gernez deuz ar re wassan
A c'hoarveaz enn amzer-man :
Ann naon a oa ken braz er vro
Ma tiskare kalz d'ar maro.
23. Ar zantez a iez da gestal
Duman, duont, d'ar chaërio all
Ha drei-z-hi e oe diganet
Da Baris eunnek lestrad ed.
24. Pell diagent laraz ive
Kalz a dreo arriet goude,
Ha dreist oll pa oe spontet
Kaër Paris gant ar *Barbarets*.
25. Eur roue hanvet Attila,
Pehini re d'ann oll krena,
Deu da Baris 'neur vrezellin
Wit he laerez hag he dewin.
26. Ar zantez d'ann oll a lar neuze
Lakat ho fians enn Doue,
Na vije ket kaër kemeret,
Na den na nije droug abed.
27. D'anter noz, weljeur ann arme
O redek spontet a c'hane,
Wit mont da glask d'ann Itali
Kaërio ezetoc'h da drec'hi.
28. Neuze zantez Genovefan
A oe deud mad barz ar gaër-man,
Pa wele nag a vuzudo
A re dre nerz he fedenno.
29. Goude ma devoa tremenet
Pewar ugent vla war ar bed,
Ann Env a deuaz da c'hoantad
Kurunin he obero mad.
30. Uz d'ann oter e oe zavet
He relego ken binniget,
Enn Paris, iec'h ma man breman
Ilis santez Genovefan.

31. Mar gre burzudo 'nhe bue,
A leñ ann Env ra c'hoas bemde,
Pellad a ra ann ter gwalen :
Brezel, kernez hag ar vosen.
32. Ouspenn, piou benag he fedo
He gallond bepret a welo,
Vel ma oe gwelet enn Paris
Kerz ma rene ar c'houec'h ved Louis.
33. Eur c'hlenvet meus bet ankeniuz,
Evel eunn tan kri haleskuz,
Re d'ann dud merwel vel dewet
Hep allout kaout louzou abed.
34. Ar vidisinet anzave
N'anveent ket ar c'hlenvet se,
Ha ken spontus ao ma laret
E varve 'n dud kenket skoet.
35. Pedet a oe Genovefan
Da derrin c'hoaz ar walen-man,
Hag he relego binniget
Enn *prosession* oe douget.
36. Pa distroaz barz an ilis
Ar relego ze war ho giz
Parzek mil den, bian ha braz,
Enn eunn tól rac'h en em gavaz.
37. Parous Guenezan da douar
A zo c'hoaz hirie leñ a c'hloar
Pa teuz miret ar relego
A re kement a vurzudo.
38. O, zantez vraz Genovefan,
P'oc'h azeet er gloar breman,
Deut da zikour ho pugale
D'ar allout enn Env ganec'h eunn de.

Ann hini a gano ar c'hantik-man enn Eskopti Zant-
Briek gant gwir doujans Doue a c'honeo daou ugent
devez a induljans.

Sant-Briek, ann 9 a viz ebrel 1887.

† EUGÈNE-ANGE-MARIE

Eskop Zant-Briek ha Treger.

(PROPRIÉTÉ).

Lannion, imp. Anger.